

15

Ha pa he deuz deomp ar Verc'hez  
Merket kement a garantez,  
Pa he deuz evidomp pedet,  
Penoz kredi e vemp kollet ?

16

O Kalon Jesus, gouskoude  
Lakit muioc'h a garante  
En hor c'halonou dinerzet  
Ha troet varzu ar pec'het...

17

Kalon Jesus, dre ho poaniou  
Ha daelou Rouanez an Envou,  
Dre ho maro, oh ! ni ho ped !  
Pardonit deomp, p'hon euz pec'het!

18

Ha ra drec'ho ho karante  
Fallagriez ho pugale :  
Var ho Kalon-Zakr entanet  
Tommit hor c'halonou sklaset.

J.-Y.

Imprimatur,

Quimper, le 22 mars 1922.

P. MESSENGER, v.-g.

# D'ar Galon-Zakr

TON : *Piou lavaro pebez glac'har.**Pl. : o Galon Zakr ----*

1

Lavarit din, pobl ken karet  
Penoz e meuz ho klac'haret ?  
Daoust hag a douez ar baianed  
Ne meuz ket bet ho tibabet ?

2


Ha gouskoude var douar Frans  
Da m'hano ve gret dismegans :  
Va c'hroaziou a zo diskaret,  
Ha dalc'hmad e ven blasfemet !

3

Peseurt grasou 'meuz deoc'h nac'het ?  
Ho pro eo kaera 'meuz krouet :  
Etouez holl broiou an douar.  
Ar Frans a zo bepred dispar.

4

Grasou puill e meuz deoc'h roet,  
Araog m'ho peuz o gouennet,  
Ha diwallet e meuz ho pro  
Diouz *de* enebourien garo.



5

*Ma*  
~~Daoust ha ze a~~ vefe kiriek  
 Ve d'an Iliz ha d'ar belek  
 Nac'het pep gwir ha gret brezel !  
 Her gouzanvet e meuz re bell.

6

Daoust ha ne meuz ket deoc'h roet  
 C'houec'h deiz er zizun var o hed ;  
 Perag ouzin ez eo laeret  
 Ar zul e meuz 'vidon miret ?

7

Savet e meuz sakramanchou  
 Evit rei perz e m' meritou :  
 Perag n'int ket darempredet,  
 Ez int a vec'h anavezet ?

8

*Ma* Vamm evidoc'h 'deuz pedet,  
 Var ho pro<sup>a</sup>deuz bet lenvet,  
 Ho pugale 'deuz kelennet ;  
 Siwaz ! ne ket bet selaouet !...

9

O Kalon Zakr euz va Jesus,  
 Ia ! kement-se zo glac'harus ;  
 Mes 'vit skuill bennoz ha pardon,  
 Digorit, Jesus, ho kalon !

10

Salver Jesus, dre ho poaniou,  
 Ankounac'hait hor pec'hejou ;  
 Truezit c'hoaz, roit deomp pardon !  
 Vit se eo digor ho kalon.

11

Anzav a reomp hon euz pec'het ;  
 Truez, o Salver benniget,  
 Truez abalamour d'ar fae  
 Hon euz gret var ho karante !

12

Daoust gouskoude ho Merc'h hena  
 N'he deuz ket bepred da genta  
 Gret hoch' anaout hag ho karet,  
 Hag hoc'h Aviel embannet ?

13

Potred dispont a ve kavet  
 Vit difenn ho kwirioù bepred  
 Var douar Breiz hag e Bro-C'hall  
 Hirio kerkoulz evel gwechall.

14

Galvet hoc'h euz hor iaouankiz  
 Da rei o huez d'an Iliz :  
 Daoust ha kilet 'deuz aliez,  
 Pe zoken klasket digarez ?